

KANTIK NEVE

Itron Varia Sant-Kare

En Parrouz Lanvellec, eskopti Treger



War don : *Bosen Elliant*

DISKAN :

*Itron Varia Zant Kare,
O mamm Jezus, Mamm a drue,
Goulennet evid on pardon :
C'houi zo ma Mamm ha ma Itron*

Goulet ma chomo gras Doue
En em c'halon, Mamm a drue :
Pa vin gant Doue arri mad,
Am o ezetoc'h ma mennad,

Chapel Zant-Kare, enn out te,
Me garfe bean noz a de,
Me garfe bean gant Mari.
O sonjal en he foanio kri !

Evid-on-me ec'h eo maro
Jézuz, ho Mab, ha ma Otro,
Evid ar pec'her paour, allaz !
Ec maro Jezuz war ar groaz.

Gant skourjeo eo dispennet
Kaeran Mab a zo bet ganet ;
Pebez kalonad 'vit Mari :
Jézuz n'eo ken 'met eur gouli !

Roue an Ee hag an douar,
C'houi neuz eur gurunen dispar,
Eur gurunen spenn war ho penn !
Evit ho Mamm pebez anken !

War hent ar C'halvar e kavan
Ar Werc'hez Vari o ouelan :
C'hoant poket d'he Mab he deuz c'hoaz
Arog ma varvo war e groaz.

Hag ar Judevien a lere
Da Vamm Jezuz pe dostee :
*« Petra 'leuz-te da glask aman
« Gant eun torfelour ar brasan ? »*

Ha war Jezuz o deus boutet,
Hag e Vamm baour 'deuz argaset ;
N'halla ket laret kenavo
D'he Mab Jezuz rog e varo !

War ar C'halvar e ouele c'hoaz :
Allaz ! he Mab a zo en noaz,
En noaz war ar groaz astennet,
E dreid hag e zaouarn tachet.

Zao en ez sao, Kroaz ma Zalver,
Ma vi gwelet gan ar bec'her,
Zao en ez sao 'vit ma welo
Pera 'n euz groet e pec'hejo !

O ! pegen kar, Mamm vinniget,
O ! pegen kaer, oa ho kwelet,
'N ho saoo ouelan truezuz,
En kichen kroaz ho map Jezuz !

Jézuz d'e Vamm en euz laret :
*« Ma Mammik paour, ne ouelet ket,
« Ma Mammik paour, ne ouelet ken,
« Beet sonj euz ar bec'herien ! »*

*« C'houi 'oar perak ec'h on aman,
« C'houi 'oar evit piou e varvan...
« Ma Mammik paour, ne ouelet ken,
« Ha beet Mamm d'ar bec'herien ! »*

Me ho salud, Gwerc'hez Vari,
O ma Mamm vad, mar zo hini !
Ho mab Jezuz dre e varo
'Neuz digorer dor an Envo.

Kri ve ar galon na frailhje
O welet Mari d'abarde,
He Mab war he barlen gant-i
Ha hi 'poket d'ar pem gouli.

Hec'h ine paour war benn neuze
A oa treuzet gant zeiz kleve...
O ! nan, biskoaz war an douar
Ne oe gwelet brasoc'h glac'har !

Me dei bep bla da Zant Kare,
D'ho saludi. Mamm a drue,
Me dei bep bla, da neubetan,
Da welet ar Vamm a garan

Ne ouelet ken 'ta me 'ouelo,
Rak me 'zo kiriek d'ho poanio,
Ne ouellet ken d'ho Mab Jézuz,
Me 'ouelo d'ean truezus.

Kalz 'zo allaz ! ne ouelont ket,
Ha braz 'n o ine ar pec'het
Evit-e ive, ive me 'ouelo,
M'o devo keun d'o fec'hejo.

Itron Varia a Drue,
Miret o Fe d'hon bugale ;
En Breiz Izel, o ma Itron,
Dalc'het ar gwir Rilijion

Miret o Fe d'ar Vretoned,
Hag ar Vretonet dei bepred
Da welet chapel Zant-Kare.
Hag Itron Varia drue.

Nemet glac'har liez n'eo ken
War an douar bue an den,
Nemet glac'har ha trubuilho
Da c'hortoz devez ar maro.

Gont ma unanfet, ô Mamm vad,
Ma foanio-me gant re ho Mab.
Me ne rin van 'vit skull daero,
Hep dale en Ee me 'gano !

Otrei » reomp moulan ar c'hantik-man en
enor d'an Itron Varia Sant-Kare.

Sant-Brieg, en 30 a viz Mae, 1884.

A. DUBOURG, vikel vraz.